

Le Tourneur Jean (Pleraneg 1837 –Landreger 1898)Beleg (Peron Tonkedeg)
Recueil de poésies diverses, bet embannet e 1890). Modernnaet eo bet an doare-skriva.
Ar werz a zo amañ war-lerh 'zo bet greet er bloaz 1868, pa oe degaset da Landreger relegou
an Aotrou Augustin Ar Minter, eskob diwezañ Landreger.

Taolenn

D'an aotrou Ar Minter.

Froudenn.

Devez ar Mestr-studi.

D'an aotrou Ar Minter

Anken ha joa, setu 'r bed-mañ
Ar barz eta, en e werzou,
War e delenn prim da ganañ,
A gar ivez skuillañ daerou.

On Eskob 'zo distro, dre oll pebez dudi !
Ha petra a dalv komz pa drid ar halonou !
Na piou 'hellfe lared e boaniou meurbed kri' !
E êl-mad a rankfe diskenn euz an Neñvou.
Dond a ran koulskoude da ganañ eur werzig
En ero d'an Aotrou Augustin Ar Minter,
'Vid ma skuillo warnon e vennoz pinvidig.
Ha ivez e genvreur Augustin a Dreger.

Liez gwech ar mor glaz gand e goummou eonuz,
O houren ouz ar boan hen gwelas diskaret,
Pa gleve, 'barz an oabl, ar hlemmou truezuz
A gase on zud-koz d'o Zad muiañ karet.
Hag ar vouez a lare : « Oanigou heb divenn,
Ni 'vo 'ta lazet oll gand ar bleiz konnaret !
Aotrou Doue, mar plij, eu zell war on traoñienn.
Truez ouz Tregeriz dirazoh daoulinet. »

A-ziabell eun tad a gleo e vugale ;
Dreist-oll ma'z int gwasket gand breh dir an anken.
E skouarn 'zo dihun : e bedenn da Zoue
A strinko birvidig, evel eul luhedenn.
Aliez war an aod, skuiz o skuillañ daero',
A wrizenne e dal gand ar c'hoant d'on gweled,
E zorn on hinnige ... abred emziwadet.
Kenavo er bed all, Eskob karantezuz !!!

Na petra 'laran-me ? A ! Euz bro an estren
On Zad a zo distro ! Meulodi deoh, Jezuz !
E-harz e relegou, ni 'vo muioh kristen.
On Eskob 'zo distro ! Dre oll, pebez dudi
A lugern war on tal, a domm on halano' !
Kan eta, Breiz-Izel, da Zoue meulodi.
Na baouez da ganañ ; da Eskob 'zo distro !
Enor da Vreiz-Izel ! Dre oll eh eo brudet
E garantez dispar : hag ar Feiz en or bro
A-viskoaz dorn-ha-dorn ganti en-desu renet :
Kentoh evid o holl ni 'redfe d'ar maro.

En peuh 'ta, Pastor mad, kousk da hun diwezañ
E-touez ar Vretoned ; gwir verzer euz ar Fe'.
Te 'lavaro bemdez d'on bugale vihan

N'hell den kared e vro, ma ne gar mui Doue,
Sao da benn, Landreger ! Da Iliz-Veur ken kaer
Hebdale marteze ne vo ken intañvez,
Kas bepred kaloneg da bedenn d'on Salver,
Mir ervad e Lezenn, hag eñ a glevo da vouez.
Hirie e stardom oll on muzellou tanet
Ouz Arched an diwan deuz Eskibien Dreger ;
Arhoaz, ma kar Doue, e teufom daoulinet
Da degeme bennoz eun eil Aotrou Minter.

Da hortoz, kanom en eur vouez :
Enor d'an Eskob a Dreger !
Da vevo bepred en on zouez
Ano an Aotrou Ar MINTER !

Ne blij da den bezañ tamallet da vezañ laer. Diwar-benn ar Werz 'zo diaraog e oa bet laret, gand eur re bennag, ne oa ket ar brezoneg diwar ma danvez ; Kerkent e oe greet ar Froudenn-mañ. Evid harz da gaoud dant ouz den ebed, n'am-oa ket goulet anavezoud an tamaller.

Froudenn

Sotañ den 'zo war an douar
Am-eus gwelet, n'eus ket e bar,
War eun dachenn, digor d'an oll,
E zonnj gonid da hortoz koll
Eun nebeud barzed, diwar dro,
'Zo diskennet gand o gwerzo'.
A-dost, a-bell 'oa sellerien
Tro-a-zro d'ar hourennerien
Ha peb unan d'e vignoned
A roe 'r maout en e spered.

« Beh d'ar c'hoari ! an oll a lar
Penaoz an taoliou 'zo dispar :
Biskoaz ken koantig abadenn
Na oe gwelet en on zraouñienn. »
'Vels-e 'lere, hep klask troiou,
Neb a zelaoue ar gwerzou,
Pa glevis eun azen kornieg,
Braz e zellou ha skouarnieg,
Tad-koz an ezen eo, me 'gred ;
Ez a da vreugiñ, selaouet :
Pa gomzo galleg e-po mez,
D'e vrezoneg, taolet evez.

- *Unan dimeuz ar jouteurien*¹
'N-eus ampruñtet e levitenn,
Ne gombat ket gand armo'
Diktet zo dezañ e vernio :
Ar jeu eta n'eo ket "vrai"
Kar, 'vel ma lerer, fasil e'
E kle peb den goro e zaout
Ha nann êsa laerez ar maou²t.
Setu ma lavar ma den gouizieg :
Ahanta ! Selaou, genaoueg :
Eur mignon a ra dit kentel,
Dastum anezi 'bazz da hodell.
A-raog sevel na mouez na penn
Kerz prim d'ar skol da zeskiñ lenn.
E-pad deg vloaz 'tavo da heno'
Hag e vi furroh... Kenavo.
r maout 'm-eus gwelet n'eus ket pell,

¹ jouteurien : ar varzed (hervez an droidigez e galleg).

² ar maout : notenn el leor orin : Eur maout 'vez roet en Breiz-Izel d'an neb a honez ar gourennou.

Ha pa 'n-eus klevet ar brezel
Eñ 'n-eus diskouezet din raktal
Ar herniou savet war e dal.
Maoutig bihan, pa vi 'n ez ment
Bale da gerniou en pep hent,
Ha mar klevez ar genaoueg
Beh d'e gov-karr en brezoneg.
(1868).

Devez ar Mestr studi

D'al lenner : *Ar werz galleg a zo amañ a-geñver, a oe greet er bloaz 1858, en Dinan, e-leh ma oan Mestr Studi.*

Er bloavez 1862, pa oan kure en Toñkedeg, e teuas em fenn, evid deskiñ gwelloh ar brezoneg, dizreiñ ma gwerz galleg en yez koz on tud-koz. Deread eo dim kavoud an diou yez, peogwir int anavezet en Eskopti.

*War veg e deod mui a hirio
A zeu da'n neb a ra gwerzou.*

Bim Baoñ ! Bim Baoñ ! Bim Baoñ ! Red eo sevel, paotred ;
War-zao ! Pell a-walh 'zo oh aze o kousked.
Gourvezet 'n ho kwele ne fell ket deoh moarvad
Chom da dibikouzañ, eun eur, ho taoualagad.
Hastet 'ta dinikouzañ, rag lagad an Aotro'
Ne vo ket gwell vignon pa deuy d'ober e dro...
Rei a ran, koulskoude, 'vid dond diwar ho klud,
D'ar skolerien dieg rabat a bemp minut ;
Eun all c'hoaz ! Ha goude gwaz eo d'ar paourig kêz
N'en-devo ket lakaet e gorvig war ar mêz.
Setu 'tond ar barner... E dal 'zo ridennet,
Hag en e zaoulagad a zo tan ha luhed :
Sellet outañ ervad, bremazond e vo beh
Kouezi a rey tro-ha-tro eur grizill bara zeh³.
Setu euz ma devez ar penn kentañ bemde',
An daou benn 'vo heñvel en eil ouz egile.
Gortozom evelkent, ma c'hwezfe an avel
E reufe skedusoh an heol da zevel.
Mond a ran en eur zal, ar Studi heh ano ;
Eur Studi an dra-mañ ? Ya, eme ho keno',
Me 'garfe ho kweled savet 'barz ar gador
Abred war an tu all ho kenou 'vo digor :
A-gleiz, a-zehou, dre oll 'mañ dorn an diegi
O tastum da gousked paotred vad ar Studi.
Hag e lerer Studi !....

Ruziañ 'ran gand ar vez.

O weled eur ger kaer mastaret en on touez.
Me 'gleo an dud varo, dre o skiant vrudet,
O krozal er beziou, hag o zremm gounnaret
A lar ae gasoni a verv en o halon...
O malloz a rofent da heveleb laeron
Paneved... Bezet didrouz ; mar deut d'o divunañ,
Kalz diêsoh kudenn am-bo da dihunañ...
Petra 'zo ? Me 'gav din, eur morzol, em skouarn,
A sko war an anev da stummañ an houarn,
Pa glevan o zeodou, a-unan dirollet,
O tiskouez gwell-pe-well int brao distagellet...
Ar vulzun ne red ket euz dorn ar gwiader

³ eur grizill bara zeh : notenn el leor orin : Pinienn roet er skoliou.

Ken prim hag ar homzou euz genou ar skolaer.
 Koumoul a zo en oabl, hebdale e strako
 ‘Uz d’ar penn, kanfarded, mouez skiltr ar huruno’.
 Trouz ar brezel n’eo mann e-kichenn o diroll ;
 ‘Hed an amzer, kentoh,, m’o choarvezfe kousket oll.
 Bim ! Baoñ !, eme ar hloh, deut d’ar porz da hoari,
 Ha ma zud d’an daoulamm hep soñjal en o fri,
 Med allaz ! ma zelegg a zeu krenn dilavar.
 Red eo din ‘n eur wezenn he skourran en eur barr.
 Penaoz e rin-me ‘ta, telennig, ma-unan,
 Lar din piou ar gounnar ‘zo kirieg ma ‘teus doan.
 -Dre bevar horn ar porz, gra eun dro, sioulig.
 Hag e wel perag e ra din tevel mik.-
 Ha me ‘vond. Hebdale daou grenn-baotr a glevis.
 Diwar-benn eun netra e vallozent iskiz.
 Kiz, kiz ‘me ar re all. Beh ‘ta d’an taoliou dorn.
 Bremañ ‘welom pini a ranko mond d’e gorn.
 Goude kalz a lampou, unan a cho war varr
 Reud e gein ; egile, ruz-tan gand ar gounnar
 War an oll zellerien a harze euz e liou,
 Hag a-dreuz hag a-hed a sko hep selled piou.
 Bremañ e welan sklêr perag ez out tavet ;
 Pa glevez malloziñ, da gordenn ne zon ket.
 Diskenn prim ha seder, an daou grenn-baotr, hirie,
 Peb a damm bara zeh a debro da greizte’.
 Deus ‘ta war ma halon da stigmañ da gordenn,
 Ha me ‘gano ganit gwelloh, o ! ma Zelegg.
 Na stard az priatan ! Na me ‘zo evuruz !
 Ma-unan e oan trist, bremañ ‘vin dudiuz ;
 Da gan, ‘barz ma halon, a hwezo an elvenn,
 Ha, gwerzo a rin, c’hoaz, keit ‘pado ma froudenn.
 Dem eta,er mêziou, da glask dun draoñiennig
 Pe ar hoad ‘leh ma kan da Doue an eostig.
 Eno pell deuz an drouz, ha tostoh da Doue,
 Ni ‘unano on mouez gand moueziou an Êle’.
 Pell deuz an drouz ! ya da ! Me ‘gredfe huñvreal,
 Ma ‘h afen ma-unan da vale gand eun all.
 Eur wzech hepken ar zun, na mui na nebeutoh,
 D’ar yaou on digabestr⁴, d’eun eur pa zon ar hloh.
 Ma ne deu d’am fedi da ren ar skolaerien
 Unan ar pennou braz damantuz d’e grohenn...
 Sed eñ o tond d’ar red, stummet eo e henou
 Da baeañ din ma foan gand eun toullad ardou
 Eh an ‘ta da vale, pa eo greet ar marhad.
 Selled ruz ma faotred skañv a benn hag a droad.
 Gwenn int oll, ma zo den, ha gand kement ezel,
 D’ober ardou int treh da Vestr *Polichinel*.

⁴ D’ar yaou on digabestr : Notenn gand Embann an Hirwaz : d’ar yaou, en amzer-ze, ne oa ket skol.

Arru ouz toull an nor e fell da beb unan
Bezañ lakaet da vestr kerkoulz braz ha bihan.
D'ar hoad, eme unan ! ya da, eme egile !
A-gleiz ! Ya ! Nann ! A-zehou !...Ma n'on bouzar gante !
Hag e teufe Doue gand e oll gurunou.
N'oun ket hag eñ 'vougfe trouz kemend a deodou,
Daou pe dri 'm-eus krennet, e-touez ar re hirrañ.
Hag a-raog heb lared pe du-hont pe du-mañ,
Rag m'o lezfen eur wech da gerzed war ma zreid
Abred gante, zoken, n'afen ken keit he keit.
'Vid gwir, n'ouzon ket c'hoaz, o treuziñ leuriou-ker,
Peleh 'm-eus c'hoant da vond da dremen ma amzer.
En eun taol em spered 'zo savet eur gredenn
Na gavjen ket gweloh 'vid manati 'r zodiacien.

Tostaad a ra ar houlz da zistreiñ war on giz.

A-veh gand kalz a boan m'o oll deñved a gavis ;
Ha me da faoutiñ hent, o kromoliñ da vad
'Eneb ar reder-ze en-deus treñket ma gwad.

Ma spered 'zo a-dreuz abaoe ma on savet.

Gand pebez plijadur eh an 'ta da gousked !
Med ma faotred dieg, penn-da-benn 'zo heñvel
Ouz buohig ar paour n'houl' gourvez na sevel.
Karoud 'rafent, 'vid kalz, eh afen d'am gwele
Heb ober eun tamm tro d'o bountañ en o re.
Prim e rank peb unan diwiskañ e zillad,
Rag o ler a baefe, ma vent diwezad.
Ha ker, pa hen laran : hast eta, genaoueg.
Ma n'az-teus ket a hoant da gleved komzou c'hweg
O tisklêriañ, d'an oll, e vi en pinienn,
Pa na blegez da benn da zentiñ d'al lezenn.

Kousket int, maro-mik, O zeod 'zo skuiz moavad,

Rag mez, kalz ane' adelhe d'hen pilad.
Euz ma devez poaniuz, setu 'r penn diwezañ.
Bremañ 'tennan m'alan evid ar wech kentañ.
A-boan, 'vad, eo serret malwenn o daoulagad,
Ha stanket o genou goude meur a deodad,
D'an eur ma vez ar haz o lared e bater,
'Uz d'am fenn ar razed a ebat er zolier.
Kant soudard o kerzed a-unan 'n eur vandenn,
'Zo didrouz en-kichenn ma razed diarhen.
Heb mar, eru habiten 'zo deut a-nevez zo
Da zeskiñ ar brezel d'an oll razed ar vro ;
C'hoaz muioh e plij din ma skolaerien deodeg
'Vid bandenn villiget ar rederien losteg.